



RECIT

*Composet a nevez var sujet ar
malheuriou arruet gant an
dourayer vras, epad an tri
mis tremened, er blas 1852.*

Var un ton nevez.

Me o supli, Speret santel,
A c'houi, va mam, Guerhes fidel,
Da rei da entend ep appel
Dar Vretonet a Vreis-izel

Ar malheuriou zo eruet
Epad an tri mis tremened,
Dre zeluch dour a curunou,
Herves ma rapord ar helou.

Va speret zo epouvantet
Ha va memoar a zo troublet
O tond da zonjal expliqua
Malheuriou ar re efroyapla.

En devez var lerc'h Nedelec,
Devez sant Stephan beniguet,
En devez-ze e teu an eol da bara
Evel un devez ar herrea.

Pa zonnas unec-heur anter
E temnuas ar sclerder
Hac e teuas un devaligen
Epouvantabl da beb christen.

An eol a deu da eclipsa
Ac an amser da zifolla
Que na spond tud a loenet ,
Ha nombr a nez zo perisset.

Gant ur grisil epouvantabl
Hac ur hurunou efroyabl
Hac an tourmant a voa gante
A ranverse cals a diez.

Ar trous demeus ar c'hurunou
A ziscare ar mogueriou ,
Hac an dud a voa dindanne
Ho deus rinquet quol o bue.

Tri dour demeus ar re gaerra ,
Batisset demeus an terrupla ,
A zo pilet gant an tourmant
Dan douar er memeus istant.

Tri lertre o linen eus ar hae
A zo savet yar ar pavez ,
Ar guer man hanvet Damartin
Et quever, bord rivier ar Chin.

Tri-uguent plac'h o quanna var ar rivier
Berniou dilliat en o c'hichen
A zo bet a hanne transportet ;
Aboe ne dind qued bed quelet.

Tud o tond gand cargou hed
Evit ar marhat assuret
No deveus qued gallet biscoas
Guelet ar fin deus o beach.

Un iliz hanvet Corintin ,
E quever bord rivier ar Chin ,
E tre ma voa oferen bred
Zo gant ar houfont attaquet.

Habitantet leiz an iliz
A voa o servicha an ofiz ,
Den ne deus gallet sortial
Oll ho deus renquet perissa.

C'hotorizet gant tud savant
Demeus ar bord a zeitec cant
O voa en iliz beniguet
A zo dre oll perisset.

An otrou Hommon , deus e di
Ha deus e dud ho quinnadi ,
A lavaras e eur guer crenn ;
Hadieu va zud evid biquen.

An itron o clevet anezan
A gommasas prest da voela :
Perac , va fried , emezi ,
E teuid a gren d'am ambandoni ?

Ebars er Pologn hac en Turki
A memesamant e Russi
E ze bet an eost collet
Gant an dourayer dirollet.

Eur postillon e vonet ,
Gant ar goal amzer attaquet
E etat eur mest voiturier ,
E transport eus a guer da guer ,

Var an ent bras e bet surprenet
Aben teir guech et bet enlevet.
Er vech divea ma coezas
E renquas mervel var ar plaç.

E c'heul ar brassa malheuriou
E vez ar c'haera miraclou :
Distaguet e bet al loenet
Ac ur voitur a zo briset ,
Hac e c'heont dar marchossi ,
Hac hi peder leo deus oute.

Pa deuas fin dan tol amzer
Eze bed sellet ar c'hayer
Hac a zo cavet dianquet
Eis mil a nombr a loenet.

Eb conta ar vugaligou
Pa voa deud ar c'hurunou
A voa ho tivoal al loenet
A zo gant spouron perisset.

Cetu aman malheuriou eruet
Er mor , en douar beniguet :
Pedomb ar Verhes Mari
Da drei ar voalen da garti.

An hini en devez recitet
Ar c'hopi a voa gred en gallee
A zo sur ur baleer bro ;
Alan Ar Yaouanc e e hano.

FIN.

Ar Proprietour a ziven ne vo qued imprimes
nemet e lec'h ma zeo bed imprimet.

E Montroulez , e ty V^r GUILMER.